



HISTOR AN ERMIT YAN GUERIN.

CHRISTENIEN devot d'ar Verc'hes
Evidomp oll Advocades,
Clevet un Histor manific
Approuvet mat hac autantic.

Clevet hoc'h eus, me oar erfat,
Coms eus a Vontagn Monserrat,
Ur plaç dediet d'ar Verc'hes,
En eê hac en douar Rouanez.

Peder leo antier contet mat
A so d'ober tro Montserrat,
Ur Montagn a ur men antier,
Admirabl en he huelder.

Evit he situation
So seiz leo diouz Barcelon;
Me gred n'en deus var an douar
Un all hac a ve dezi par.

Rac var ar men-mâ ententet
A bep seurt louzou so savet?
Fourdlis, roz ha bep seurt plant
En han hac er gouan fleurissant.
Eno gueich-all, eme ar scrit,

(2)

Approuvet e oa un Ermit,
E hano oa Breur Yan Guerin,
Un den vertuzus ha divin.

Eno en doa un Ermitach,
Hac ur c'havarn evit partaich,
Ar grision lousou evit bouet,
Evit guele douar calet.

Continuel en Oræson,
Yunou ha meditation;
E nep feçoun an den Santel
Na gomimette pec'het marvel.

Mæs an Diaoul so e pep tremen
O clasq tenti ar Gristenien,
Finessaou a invantas,
Ha dre pere en decevas.

Furmi a ra gant diligeañç
Ur c'havarn-all en apparañç,
Ha quemeret dre illusion
Habit un Ermit a feçon.

Monct a ra da saludi
Breur Yan Guerin betec e dy,
Da ober dezàn complimant
Dre comsou caër hac eloquant.

Bonjour deoc'h dre guir amour,
Va Breur Doue, eme an traïtour;
Amezeyen omp tost meurbet,
Ha biscoas ne oamp en em velet.

Mæs da viquen, me en assur,
Ni a guemerro pligeadur
D'en em darempredi alies,
Hac o conferi assambles.

Au Autrou cont a Barcelon

(3)

En devoa ur Verc'h a façon,
 Hac en em gave possedet,
 D'ar poent-se gant an drouc-speret.

D'ar plac santel e oue gouestlet,
 Ha gant tud devot bisitet,
 Ha conjuret an æroent,
 En avis e gass en he hennt.

Evit peden nac oræson,
 Offrançou na supplication,
 Ne visent biquen deut a ben
 Da zilivra ar Femelen.

Mæs an Diaoul ne allas quet nac'h,
 A gomsas dre c'henou ar plac'h,
 Hac a lavaras evellen,
 Publicamant e ber tremen.

Breur Yan Guerin so ermit mat,
 A so o chom e montserrat,
 Hac a so mignon da Zoue,
 Dre ma er servich nos ha de.

Mar cacit ho merc'h davetan,
 Ha mar chom nao devez gantàn,
 Em obligeo dre e beden
 Da zilezel ar femelen.

Mæs ma ne achu an naovet,
 Me en tou deoc'h hac a bromet,
 Sur e retournin adarre,
 Hac e zourmantin a neve.

Ar C'hont an drase pa glevas
 A bartias gant un train bras,
 Da gaç e verc'h da Montserrat,
 D'e fresanti d'an Ermit mat.

Goude m'en devoa-èn saludet,

(4)

Hac e Verc'h dezàn presantet ,
 En er suplias humblamant
 Da conjuri an AËrouant.

Incontinent Breur Yan Guerin
 A stouas prest var e zaoulin ,
 Da requeti a vir galon
 Assistanç ouz Roue an Trôn.

Goude m'en devoa conjuret
 Breur Yan Guerin an Drouc-Speret,
 Gant mez ha gant confusion
 E sortias an ampoëson.

Ar C'hont hac e c'hompagnunez ,
 Ha Breur Yan Guerin assamblez ,
 A renta graçou da Zoue ,
 Ha da Rouanez an Ele.

An Autrou Cont a suplias
 Breur Yan Guerin gant instanç braç ,
 Da viret he Verc'h un naovet ,
 D'e c'honfima e graç parfet

An Ermit mat en em excusas ,
 Ha dan Autrou Cont a respontas
 N'en devoa quet a dieguez
 Da logea un seurt compagnunez.

Salocras , eme an Autrou ,
 Nemet hy e-unan a chommo ,
 Ny a yelo da draon ar menez ,
 Quen na vint achu an nao dez.

An Ermit er c'hommançamant
 E instruas puissamant ;
 Mæs he guenet hac he façon
 O deus anflammet e galon.

Gant an tan a goncupissanç

(5)

N'en deus repos nac assuranç ,
 Ma sorti en esper mont quit ,
 Ma rancontras ar faos Ermit.

Ma contas dezàn promptamant
 E oa e poan hac e tourmant ,
 Hac e oa guel ganta quittat ,
 Rac e speret n'alle mui pad.

Nonpas , eme ar faos Ermit ,
 N'ho queleunnan quet da vont quit ,
 Retournet , stourmit constammant
 Ous all laçou an AËrouant.

Sant Anton a ouzac'h erfat
 A oa devot hac Ermit mat ,
 Hac a so bet alies tentet ,
 Ha bepret en deus resistet.

Er Scritur memes eo lavaret
 Mar fell deomp beza curunet ,
 E rencomp bepret combati
 Pa zeu an drouc-AËl d'hon tenti.

Senti a ra ous e avi ,
 Ha retorn a ra var e c'his ;
 Mæs sellau ar Plac'h yaouanc
 En rent adarre languissant.

Un nosvez e oue quen tentet ,
 Ma oue ganta dishonoret ,
 Ha commettet fallagriez ,
 En despet d'e oll santelez.

Pa en devoa gret ar pec'het ,
 Hac e bassion contantet ,
 E teu dezàn ar repentanç ,
 Hac ur remors a goustianç.

Retorn a ra c'hoas da gavet ,

*

(6)

Ar faos Ermit ha da lavaret ,
 En devoa gret fallagriez ,
 Hac e c'houlen quelennadurez.

Me lavar dit , eme eguile ,
 Pa ouezo ar C'hont an drase
 E lacai pront o zistrugea ,
 Ha da guitaat ar bed-mâ.

Var c'hred , eme ar faos Ermit ,
 Las-hi buan hac achap quit ,
 Ha cuz-hi un tu a goste ,
 Elec'h na ouezo den doare.

Senti a ra , gant he gontel
 E treoc'h gouzouc ar Femellen ,
 Neuse en deus-hi enterret
 Elec'h biquen ne vife cavet.

Incontinent ar faos Ermit
 Eus e grim a ra ar recit ,
 Hac e teu d'ober goab anezàn ,
 Incontinent o tisparissan.

Ar paour quæz a oue estonet
 O velet erfat e oa tromplet ,
 Penaos e oa an Drouc-Speret
 D'e drompla en em dranformet.

E galon leun a huanat ,
 An daelou en e zaoulagat ;
 An hent da Rom a timat ,
 Da ansao e grimou d'ar Pap.

Ebars e Rom pa arruas
 Coms gant ar Pap a c'houlennas ;
 Ma oue roet deza antre
 Hep sæçon na difficulte.

Da dreit ar Pap en em daoulas ,

(7)

Cofes ganta a c'houlennas ;
 E grim en deveus anzavet
 Ar Pap en deus-èn absolvet.

Mæs dezàn e oue ordrenet
 Eur binigen rust ha calet ;
 Chelaouit-hy oll , me ho ped ,
 Biscoas e seurt n'hoc'h eus clevet.

Commandet oue dezàn gant ar Pap
 Retorn da Vontagn Montferrat ,
 Var e varlochou neuse ractal ,
 Eguis un aneval brutal.

Chom abed seiz vloas evelse ,
 Hep sellet james ous an Ee ,
 Quen na zeuje ur buguel
 Da lavaret dezàn sevel.

Breur Yan Guerin a acceptas
 Ar binigen gant ur joà vràs :
 Var e zaou dourn hac e zaou droat
 E commanças hent Montferrat.

Me ho less da gonsideri
 Pe seurt poan , fatig hac annui
 An Ermit paour an andure ,
 Oc'h ober hir hent evelse.

Neuse gant poan ec'h arruas ,
 E binigen a guntinnas :
 Mæs allas , e sac a usas
 Gont an amser , ma oa en naos.

Ar reun , ar bleo so divoanet
 Var e gorf , ma oue da velet
 Evel un Ours pe un Oc'h goue ,
 Quemement er guele a estone.

An Autrou Gont a Varcelob

(8)

A guemeras opinion
 Evel inspiret gant Doue
 Da vont d'ar Montagn d'ar chasse.

Al livrini hac ar chass red
 Gant ar Chavarn so arruet,
 Mæs ne gredent nemet harsal
 O velet eur seur aneval.

An dud dre ar brut so redet,
 Hac oll ez int bet estonet;
 Mont unan anezo gant spont
 D'ober recit d'an Autrou Cont.

Ar C'hont en deveus lavaret,
 Mar boa moyen e guemeret,
 Hep ober dezàn nep offanç
 Hac e digaç gant diligeanç.

Quemeret oue hep resistanç
 Ha cunduet dirac Noblanç,
 Rentet da velet d'an Itron
 E ty ar C'hont a Varcelon.

Er Merchaussi oue lequeet,
 Ha gant ur gorden oue staguet,
 Ha taolet dezàn da zibri
 Tamou bara, evel d'ur c'hi.

Un dervez e oue preparet
 E t'yn an Autrou Cont ur banquet,
 Ha conviet nombr a Noblanç,
 Evit ober æjouissanç.

Pa oant oc'h an daol æsezet
 Ar gompagnunez echoffet,
 E larjont digaç var ar plaç
 Dezo da velet ar Sauvach.

Eur Vagneres a ioa en ty

(9)

Gant ur Buguel daou vis pe dri,
 Hac antreas er Sal d'an erc'h,
 Gant ar Buguel-se var he brec'h.

Ar Buguel er c'honsideras,
 Ha distinctamant e lavaras :
 Breur Yan Guerin, sao alesse,
 Gret eo d'a accord gant Doue.

Incontinent an Ermit mat
 A savas prest var e daou droat,
 Ar compagnunes estonet,
 A chommas pell bras d'e velet.

Var e zaoulin en em laquas,
 Dirac ar C'hont e lavaras :
 Me eo Yan Guerin ar mechant,
 Goas evit barbar na tyran.

M'emeus ho Merc'h dishonoret,
 Ha goude emeus hi laset :
 Ra-se-ta grit varnon justic,
 Prest oun da souffr an oll suplic.

Dezan ar C'hont a respontas
 Gant douçder, hep arroganc vras,
 Pa zout pardonnet gant Doue,
 Va mignon, me's pardon ive.

Incontinent an Autrou mat
 A eureu prest digas dillat,
 Evel un den a ioa e grac,
 En devoa gret pinigen vias.

Varben un daou deiz goude,
 Ar C'hont inspiret gant Doue,
 A zesiras a galon vat
 Mont da visita Montserrat.

Hac a bedas da vont ganta

(10)

Breur Yan Guerin d'e assista ,
 Ha disques desan an andret
 M'en devoa e verc'h enterret.

Breur Yan Guerin a oue contant ,
 Hac a yeas ganta prontamant ,
 M'en em rentjont hep pell dale ,
 Assamblamant var ar Mene.

Pa onant erru e tiscuesas
 Breur Yan Guerin deso ar plaç
 M'en devoa ar Verc'h enterret ,
 Goude m'en devoa-hi laset ,

N'o devoa nebeudic toullet ,
 An Demesel o deus cavet
 E bues , yac'h flam ha dispos ,
 Hac hi quer rus ha boquet ros.

En he gousouc e oa chommet ,
 En andret ma oue egorget ,
 Ur merquic henvel hoc'h hini
 Un neuden a seis cramoisi.

An Autrou Cont pa e guelas ,
 Digant e Verc'h a c'houlennas ,
 Petra ma oa c'hoas e bue ,
 Ha pe seurt tourmant a sante.

En instant ma ouen egorget ,
 Ha diaraoc em bca bepret
 Particulier devotion
 D'ar Verc'hes santel , va Itron.

Hy e deveus va c'honservet
 Aman hep santout poan ebet ,
 Na naon , na sec'het , na tourmant ,
 Dre c'hraç Doue , au oll-puissant.

Deut guenen , eme he Zad desi :

(11)

Ha me lacaï o timesi,
 M'ho lacaï en ho plijeatur,
 Gant un den ha prudant ha fur.

Salocraç, emesi, va Zad,
 Desir ameus, mar be ho craç,
 E ve gret amâ ur Gouent
 E gloar da Rouanes ar Sænt.

Ma chommin ahed va bue
 Er plaç-mâ da veuli Doue,
 Da drugarecat hon Autrou,
 Hac e Vam, eus o oll graçou.

An Autrou Cont a acceptas
 Desir e Verc'h hac a laquas
 Divar e goust hep retardamant,
 Sevel eno ur batimant.

Dont a reas hep pell dale
 Merc'het devot a bep contre,
 D'accompagnuecat merc'h ar C'hont,
 O chastete a brometjont.

Breur Yan Guerin pareillamant
 A lavaras e oa contant,
 Da dremen ar rest eus e vue
 Da veza Directeur deze.

Eno o deus bet cunduet
 Eur vuez santel ha parfet;
 Ha goude o buez mortel
 Emaïnt er joa eternal.

Va Breudeur ha va C'hoarezet
 A greis va c'halon me ho pet,
 Da veza devot d'ar Verc'hes.
 En Ee, en Douar Rouanez,
 Nep a so enni e fizianç

(12)

A ell beza en assuranç,
 Biscoas nicun ebet collet
 A guement e c'harje parfet.
 Clevet hoc'heus ur miracl bras,
 Gret amâ ganti dre he graç?
 En andret un Demesel guez
 A ïoa bet dezi devodes.
 Christenien devot, me ho supli
 Da veza devot da Vari,
 Ha dre he moyen hac asistanç
 Ho pezo en Eê recompanç. **FIN.**



E QUEMPER,
E TY S. BLOT, IMPRIMER-LIBRER.